

Traoù kozh ha kaer e maner Kerazan

War an damani brav, e Loktudin e vo gouestlet ur saloñs d'ar c'hozigelloù, e-pad an dibenn-sizhun. Un 40 gwerzher bennak a ginnigo arrebeuri, bravigoù, listriaj, taolennoù...

Mac'hadourien traoù kozh eo Éric Blondiau ha Jessica Quiniou e Pont-'n-Abad. En ti Du côté de chez vous evit an hini kentañ, e stal ar familh, Quiniou antiquités, evit an eil. O daou e vezint e-pad an dibenn-sizhun er saloñs aozet e maner Kerazan, e Loktudi, gant un 40 keneilh bennak. « *Un lec'h dreist eo ha reiñ a ra talvoudegezh d'hon arrebeuri* », a zispleg Jessica Quiniou. Ar saloñsoù evel hennezh a zo un dra bennak dreist evit gwerzhañ, met ivez evit reiñ brud d'hon stalioù. « *Hon pezhioù kaerañ a ziskouezomp neuze, eme Éric Blondiau. Setu perak eo ul lec'h a feson evit ar brenerien a vez o klask traoù ral ha brav.* »

Evel evit kalz tachennoù-all ez eus gizioù e bed ar c'hozigelloù. Ar pezh a blij e d'ur poent bennak ne vez ket ken priziet kement-se hiziv. « *Ar c'hantoellerioù mod Napoleon III da skouer, a blij kement er bloavezhioù 1980, ne blijont da zen ebet ken* », a daolenn Jessica Quiniou. Pe c'hoazh an armeioù breizhat ha na glotont ket gant tiez hiziv... « *Er c'hontrol em eus atav goulennoù evit gwiskamantoù pe taolennoù livourien breizhat* », a gendlac'h hi. An arrebeuri bihan, adkempenn



net hag adlivet a zesach kement, rak ouzhpenn-se eo deuet ar prizioù izel a-walc'h. Merzhout a ra ivez Éric Blondiau ez a war ledanaat bevennoù ar c'hozigelloù en amzer: pezhioù kozhnoe a weler bremañ e-kichen traoù dezign ar bloavezhioù 1970 ha zoken 1980...

Evit ober prenañdennoù fin e ro an daou werzher un nebeut kuzulioù, ha da gentañ ober tro ar stalioù evit keñveriañ an traoù damheñvel. « *Re a bezhioù heñvel a c'hell diskouez eo bet kopiet an dra.* » Ha ret eo teurel evezh ouzh ar prizioù re izel, ha goulenn ur faturenn pe ur folenn desteni. Ha daoust ha

marc'hata a c'heller? « *An holl dud pe dost a glask hen ober, eme Jessica Quiniou, siwazh. Kaozeal a c'heller met ret eo chom fur ha seven.* » Lavaret a ra ar werzherez ne vez ket kresket ar prizioù. « *Ne c'heller ket labourat evel-se rak kevezerezh bras a zo etre ar stalioù.* »

**Troet gant Mathieu Herry
diwar M.S.Jan**

■ Saloñs ar varc'hadourien traoù kozh, etre an 3 hag ar 5 a viz Even, e maner Kerazan Loktudi etre 10 eur hag 6 eur noz. 4 euro evit mon e-barzh. (+ 2 euro evit gweladenniñ ar maner). Digoust dindan 16 vloaz. www.kerazan.fr